

MEULEUDI HA PEDEN

DA

ZANT EVY

e Sant-Yann-Trolimon



Ton : Introun Varia Lambader.

DISKAN :

A greiz hor c'halon, Bretouned,
Meulomp Sant Evy benniget
Ha goulennomp na kendalc'ho
Da skuilh e vennoz war hor bro.

bis

1. O Patron mat, Eskob Santel,
Distrei a reomp en ho chapel
Da ginnig deoc'h hor pedennou
Hor c'harantez, hor c'halonou.

bis

2. Er bed-man c'houi zo bet gwechall
Karget da ren ha da ziwall,
Da zantelaat ha da gelen
Eun eskobtiad kristenien.
3. Eul labour dispar o c'heus grêt,
Setu c'houi breman kurunet
Etouez ar zent, er baradoz,
O veuli Doue deiz ha noz.
4. Met c'houi zo karget ac'hano
Da veilha bemdez war hor bro
Dre ma zoc'h anvet da Batron
Ar japel a reomp e fardon.

5. Oh ! beilhit warnomp heb ehan,
Ma ouezimp holl ha peb unan
Karet-hon Doue dreist peb tra
Ha karet ivez hon nesa.
6. Setu, ni oar, an diou lezen
O c'heuz gwechall d'ho pobl Kristen
Aberz an Iliz, prezeget
Gant ho nerz-kalon entanet.
7. Hon harpit da garet Doue
Ha da zawetei hon ene
Petra raimp-ni gant ar bed holl
Ma ia hon ene paour da goll ?
8. Deskit deomp karet hon nesa
Hag ober peb seurt dat dezan.
Grit ma kompreno peb hini
Eo mezus maga kasoni.
9. Eneb ar boan, ar c'hlenvejou
P'eo bras ho kalloud en envou,
Deuit en an' Doue d'hon parpa
Pa deuy ar c'hlenved d'hon taga.
10. Ha pa zeo gwasoc'h ar pec'hed
Eget n'eo kant ha kant klenved
Grit deomp beva e gras Doue
Ha mervel en e garante.

A. C.